


8N2-2-068

Morlaix



C A N T I C

EN ENOR DA

# SANT MARTIN

Escop Tours

**Patron parrez Sant Martin-Montroulez**

Var ton ar : *Pange solemnes*  
pe unan eus toniou an : *Iste confessor.*

Celebromp hirio gant laquenediguez  
Triomph sant Martin, patron bras or parrez,  
Curunet a c'hoar e palez eternel

An Drindet sanctel.

Piou a lavaro buez ha virtusiou  
Or patron caret, ha pebez buzurdou  
A reas gueichall, dre zaouarn san Martin,  
On Salver divin.

D'an oad a zec yloaz, bras meurbed oa ar c'hoant  
En doa da receo dour sacr ar vadisiant,  
Rae ganet e oa eus a guerent paien,  
Stard er fals creden.

Truezus meurbed en andret ar beorien,  
C'hoas soudard iaouanc, aroc beza christen,  
E troc'h he van'el evit golo diou' scoaz  
Eur paour kez en noaz.

Eur veich badezet, sant Martin a lavar  
Kenavo d'ar bed, d'lie vadou ha d'he c'hoar,  
Ha diwar neuze, da scuer e kemeras  
Jesus gant he groas.

Ni'velo netze, Jesus hag ar Verc'hez,  
Ac en dro dozo, ar Sänt ac an Äelcz,  
Beuzet en eur mor a blijadurezou.

Ac a zelissou.

Gloar d'an Drindet saer : Tad, Mab ha Speret Glân  
Nereont, a vicoaz, ho zri, nemet unan,  
A c'houarn ar bed, ac a ren en Envou  
Hed ar c'hanvejou.

AMEN.

V. Pedit evidomp sant Martin.

R. Evit ma vezimp rentet dign eus a bromessaou  
Jesus-Christ.

CRESON — Doue, c'hui ac a vel ne ellomp, e guis  
ebet, en em souten dre on nerz on unan, accordit  
deomp, en ho trûgarez, ma vezimp dre intercession ho  
servicher sant Martin, Confessour ac Escop, kennerset  
eneb kement tra a ello stourm ouzomp er bed-mä. Bre  
on Autrou Jesus-Christ, etc.

Quimper, 26 Octobre 1892,

IMPRIMATUR :

E. FLEITER,

VIC. CAP.

Morlaix, imp. LANOE.

Douss evel eun oan, chast, humbl ha patient,  
Carguet, a ent all, ha furnez, a skiant,  
E tennas varna, betec er solitud,  
Daoulazat an dud.

Choazet da Escop, e savas eur gouënt,  
Ha gant ar venac'h (edont pevar uguent),  
Ec'h en em roaz, eno, corf hag enc  
Da servij Doue.

Noz-deiz he pede ac e r<sup>e</sup> pinijen,  
E scuille daëlou evit ar bec'herrien,  
Ac e tiskenne tan ar gontrition  
Var selass ho c'halon.

Ac a eneou da Zoue gounezet !  
Ac ar glanvourien ganta bêt pareet !  
Eus pep corn a Frans e teue hon tud coz  
Da g'asc he vennoz.

Galloud en devoa var ar maro, soken,  
Ha betec teir gueich, eus he c'hrabanou ien,  
Ar Sant, o pedi caloneg ha gant feiz,  
A dennas he freiz.

Nan, nac en or bro, nac e bro all ebet.  
N'eus ket bet eur sant muioc'h anavezet,  
Ini n'en deus grët kement a vurzudou  
Ac a viraclou.

En a gonsacras, dre urs Cador sant Per,  
An Escop ken mad, sant Corentin Quemper,  
Ho daou oant kerent, ho daou par d'an Aez  
Dre ho santelez,

Pa glanvas ar Sant, he eskibien caret :  
« Tad her, emezo, o ! n'on dilezet ket,  
« Guelit ho sailla dija var ho tenved  
« Bleizi counaret. »

Ac en da Zoue a rë ar beden-ma :  
« M'ar d'on necesser d'ho pobl, c'hoaz emeza,  
« Me'labouro c'hoaz, ma roit d'in buez,  
« Grit ho polonetz. »

O ! den burzodus, d'al labour trec'h ato,  
Eb galloud beza rec'het gant ar maro,  
Caout aon da verval n'ouie ket petra oa,  
Na refus beva.

Ractal ma varvas, mouesiou melodius  
A ganas en aer cantikou dudius ;  
An Aezel santel a oa deut da guerc'had  
Ene caer on tad.

O ! patron santel, sant Martin benniguet,  
Tad carantezuz, er bed oll ken brudet,  
C'houi a zo brema en tu deo da Jesus,  
Var eun iron skedus.

Ah ! taulit varnomp eur sell a drugarez,  
Varnomp, bugale sant Martin, ho parrez,  
Grit ma tiskenno glizen douss an Envou  
Var on c'halonou.

Pedit, sant Martin, pedit evit ar Frans,  
Obtenit dezi sicour ac assistans,  
Ma c'hello, erfin, trec'hi enebourien,  
Feiz ar bobl christen.

Da lliz Doue, tud fall a ra brezel,  
O ! pedit Jesus da rei ners d'he Vikel,  
Ha d'asten bepred he vrec'h oll-galloudec  
Var Leon trizec.

Grit ma zaimp, eun deiz, oll ganec'h da repos,  
Da velet Doue e gloar ar Baradoz,  
Elec'h ma cavimp, gant ar goir evrusted,  
Peb seurt joaiusted.